

TRUEZ, GWERC'HEZ VARI !

KANTIK AR VREZEL



Gwer-c'hez Va - ri, daou - li - net holl di - rag ho - skeu - den,



Ni ho ped da rei skoa - zel d'hor bro ger en an - ken :



Vik - tor ha peoc'h gou - len - nit di - gant Dou - è dez - hi...



He stad a zo gwall boa - nius : tru - èz, Gwer-c'hez Va - ri !

Gwerc'hez zantel, Rouanez an nenv hag an douar,
Gwelit : hor Breiz ' zo beuzet e 'r c'haonv hag e 'r c'hlac'har, —
Bro Frans, Merc'h hen' an Iliz, a zo braz he enkreuz...
Piou ' zeui 'ta d'ho frealzi nemed-hoc'h c'hwil, Gwerc'hez ?


Ia, Mam, gant tud digalon hor bro gaer ' zo breset, —
 O d'euz, 'n eur zond d'he gwaska, grêt kant ha mil torfed.
 Pegoulz 'ta, Mam a druëz, e reot d'an dud fall-ze
 Dizrei d'ho bro ho-hunan, trec'het gant hor c'hleze ?

O Mam, evit hon difen a-eneb al laeron,
 Holl hor breudeur ' d'euz redet, gras Douë 'n ho c'halon,
 Evit ar Frans ho mam-vro prest da rei ho buhez...
 O Mam, klevit hor peden : varn-ho beillit bemdez !

Siouaz, e-kreiz ar stourmad, kalz dija ' zo maro :
 Ma 'z aint buhan d'an Nenvou, Mam, pedit evit-ho !
 Pedit c'hoaz 'vit ar gragez, mammou ha minored
 O d'euz kollet e 'r vrezel ho zad, mab pe bried !

Oh ! gloar d'an Drinded zantel, tri Ferson e Douë,
 Ha gloar d'ar Werc'hez Vari, Mam Jesus hor Rouë !
 Ra zeu' an holl d'Ho c'hared, ha dre-holl ha bemde,
 Ma 'z aimp kevred d'Ho meuli d'ar Baradoz goude !

Amen.



IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 8a Decembris 1915.

A. GADON, v. G.

Ce petit cantique, composé sur un vieil air breton, est en vente aux bureaux du *Courrier*, rue du Château, à Brest, et chez le R.P. TRÉBAOL, O.M.I., Ecole Saint-Vincent, à Quimper, aux prix suivants :

1 ex., 0 fr. 05 ; — 12 ex., 0 fr. 50 ; — 25 ex., 1 fr.